



# Liseidi Diwan o familhoù hag ar brezhoneg

Enklask kaset da benn

etre miz Du 2019 ha miz Genver 2020

314 lisead Diwan (2vet, Kentañ klas, Termen)

Kenurzhiañ an enklask : Katell Chantreau (doktoradez Skol-veur Roazhon 2, CREAD)  
ha Gildas Grimault (kelenner Skiantoù ekonomikel ha sokial e Lise Diwan Karaez)

Alioù : Stefan Moal (CRBC / Roazhon 2), Hugues Pentecouteau (CREAD / Roazhon 2)

Skoazell : Lise Diwan Karaez

Sevel ar rentañ-kont : Katell Chantreau, Gildas Grimault  
ha Catherine Bouroulleg (Ofis Publik ar Brezhoneg),

Maketenniñ : Catherine Bouroulleg

<b>1.</b>	<b>Kinnig an enklask.....</b>	<b>3</b>
1.1.	Ur raktres daou berzh ennañ .....	3
1.1.1.	Ur perzh pedagogel .....	3
1.1.2.	Ur perzh skiantel .....	3
1.2.	Sevel ar c’houlennaoueg .....	3
1.3.	Dastum hag enrollañ ar respontoù.....	4
1.4.	Kodiñ ar roadennoù.....	4
1.4.1.	Sevel rummadoù .....	4
1.4.2.	Sevel feuriaderioù .....	5
1.5.	Doare kinnig ar respontoù .....	7
<b>2.</b>	<b>An disoc’hoù simpl .....</b>	<b>8</b>
2.1.	Al liseidi .....	8
2.1.1.	Piv eo al liseidi ? .....	8
2.1.2.	Al liseidi hag ar brezhoneg .....	10
2.2.	Mammoù ha tadoù al liseidi .....	14
2.2.1.	Piv int ? .....	14
2.2.2.	O barregezh war ar brezhoneg .....	15
2.2.3.	O santimant ouzh ar brezhoneg .....	17
2.2.4.	Treuzkas ar brezhoneg dre ar skol .....	17
2.2.5.	Treuzkas ar brezhoneg er familhoù .....	18
2.3.	Neuz yezhel familhoù al liseidi .....	19
2.3.1.	Barregezh ar gerent war ar brezhoneg.....	19
2.3.2.	Santimant ar gerent ouzh ar brezhoneg .....	20
2.3.3.	Treuzkas brezhoneg .....	20
2.3.4.	Ur feuriader hollek « neuz yezhel ar familh » .....	21
<b>3.</b>	<b>An disoc’hoù kroazet.....</b>	<b>22</b>
3.1.	Levezon an elfennoù sokiodemografek .....	22
3.1.1.	An oad / al live klas .....	22
3.1.2.	Ar jener .....	26
3.2.	Levezon an hentad skoliata .....	29
3.2.1.	Ar skoliata er c’hentañ derez .....	29
3.2.2.	Ar skolaj orin .....	32
3.3.	Levezon neuz yezhel ar familh .....	35
3.3.1.	Barregezh yezh ar gerent ha treuzkas er familh .....	35
3.3.2.	Santimant ar gerent ouzh ar brezhoneg .....	39
<b>4.</b>	<b>Profil brezhoneger al liseidi : un dipologiezh.....</b>	<b>42</b>
4.1.	Profil al liseidi hervez o frofil brezhoneger .....	42
4.1.1.	Reizh .....	42
4.1.2.	Hentad skoliata .....	43
4.2.	Liamm etre profil brezhoneger al liseidi ha neuz yezhel o familh .....	45

# 1. Kinnig an enklask

## 1.1. Ur raktres daou berzh ennañ

E miz Mae 2019 e oa bet pedet Katell Chantreau da ginnig hec'h enklask war treuzkas brezhoneg er familhoù dirak tri c'hlasad eus lise Diwan Karaez. D'ar mare-se e oa kroget eskemmoù etre Katell Chantreau ha Gildas Grimault, kelenner Skiantoù ekonomikel ha sokial el lise, war ar mod da zoonat ar preder-se gant al liseidi. Diwar-se e oa bet ijinet ur raktres daou berzh bras ennañ : ur perzh pedagogel hag ur perzh skiantel.

### 1.1.1. Ur perzh pedagogel

Etre miz Du 2019 ha miz Genver 2020, da-geñver kentelioù Skiantoù ekonomikel ha sokial, e oa bet kinniget d'ur c'hlasad eilvet eus lise Diwan Karaez (Eilvet Du) sikour sevel ha kas da benn un enklask el lise diwar-benn al liseidi, o familhoù hag ar brezhoneg. Meur a bal a oa bet lakaet d'an dra-se evit al liseidi :

- dizoleiñ metodologiezh un enklask sokiologel produiñ sifroù,
- kompren penaos e vez levezonet sokializadur ar re yaouank gant ar familh ha gant ar skol,
- prederiañ, hep barnañ, war implij ar brezhoneg gant al liseidi.

Plijus o deus kavet al liseidi sevel ur c'houlennaoueg. Dedennet int bet gant an disoc'hoù kentañ hon eus gallet kinnig dezho, dreist-holl ar re tost outo : levezon ar jener, levezon ar skolaj orin pe al live klas. Klasket o deus displegañ an disoc'hoù.

### 1.1.2. Ur perzh skiantel

Ouzhpenn ar perzh pedagogel evit al liseidi e oa ur perzh skiantel a-dreñv d'ar raktres-se. Tri fal bras a oa bet lakaet :

- kompren gwelloc'h endro yezhel al liseidi,
- produiñ sifroù evit magañ un enklask war treuzkas ar brezhoneg er familhoù kaset gant Katell Chantreau da-geñver un dezenn e Skiantoù an Deskadurezh, renet gant Hugues Pentecouteau ha Stefan Moal, hag arc'hantaet gant Skol-veur Roazhon 2 ha Rannvro Breizh,
- sevel un ostilh padus evit studiañ emdroadur an treuzkas brezhoneg er familhoù er bloavezhioù o tont, gant ar soñj adober an enklask-se el liseoù Diwan, bep tri bloaz, pa vez nevesaet penn-da-benn ur rummad liseidi. An OPAB a gemero e karg an enklask-se en dazont (dalc'h kentañ e 2022-2023).

## 1.2. Sevel ar c'houlennaoueg

An dachenn studi a oa sklaer ha bevennet mat : lise Diwan Karaez, 315 lisead ennañ. Kensavet e oa bet ar c'houlennaoueg gant ar c'hlasad eilvet ha Katell Chantreau. Da gentañ e oa bet savet asambles roll an titouroù hollek a felle deomp dastum (reizh, klas, lec'h bevañ...). Goude-se e oa bet savet daou strollad : unan o labourat war ar brezhoneg er familh hag egile war liamm al liseidi gant ar brezhoneg. Temoù resis a oa bet roet da bep strollad (da skouer : live brezhoneg al liseidi, implij ar brezhoneg gant ar vignoned, gant an dud-kozh, perzh er stourm...), dezho da stummañ goulennoù serr ha respontoù.

Dastumet e oa bet an holl ginnigoù ha savet ur sintezenn diwarne. Kaset e oa bet ar sintezenn-se d'an OPAB evit kaout o ali, ha graet un nebeud cheñchamantoù diwar o evezhiadennoù. Pleustret e oa bet ar c'houlennaoueg er c'hlasad, gant 20 eilvead. Kemmet ha resisaet e oa bet un nebeud goulennoù diwar evezhiadennoù ha diaesterioù bet gant al liseidi-arnod. Prest e oa neuze ar c'houlennaoueg da vezañ skignet.

### 1.3. Dastum hag enrollañ ar respontoù

An eilveidi e karg eus ar raktres zo tremenet a glasad da glasad da ginnig ar raktres d'al liseidi all. Displeget o deus goulenn-mañ-goulenn pa oa ezhomm. Pep lisead en deus respontet d'ar c'houlennaoueg e-unan, war baper. Ur c'helenner a veze ganto atav. Un 50 goulennaoueg bennak zo bet dastumet gant Katell ha Gildas : re liseidi ezvezant devezh an dastumadeg ha re liseidi o deus ranket adleuniañ ar c'houlennaoueg un eil gwech peogwir e oa bet kollet ur pakad goulennaouegoù bet kaset dre ar post. Lod anezho o deus respontet d'ar goulennoù war-eeun en linenn.

#### **315 lisead a oa skoliataet el lise e 2019-2020, 314 anezho o doa respontet d'ar c'houlennaoueg.**

E-korf div gentel SES eo bet ebarzhet ar respontoù en un diaz niverel (furmskrud SPIP). Ar c'helenner SES a veze ganto atav. Lod liseidi o deus enrollet ar roadennoù e-pad o frantadoù dieub ivez. Diaesterioù zo bet merzet. Da skouer, pa veze start adlenn ar respontoù dornskrivet peotramant pa ne oa ket bet doujet ouzh ar meneg « 3 abeg d'ar muiañ ». Katell Chantreau he deus gwiriet hag unanet an holl respontoù ebarzhet gant al liseidi.

### 1.4. Kodiñ ar roadennoù

Daou seurt roadennoù zo bet krouet goude ma vefe bet enrollet an holl respontoù : rummadoù ha feuriaderioù. Ar rummadoù zo anezho disoc'h kroazamant meur a respont. Ar feuriaderioù zo anezho disoc'h sammadoù poentoù bet lakaet da veur a respont.

#### 1.4.1. Sevel rummadoù

##### ○ Familhoù « doubl »

Diskoachet eo bet al liseidi o doa ur breur pe ur c'hoar e lise Diwan Karaez evit gellet tremen eus al liseidi da familhoù al liseidi hep kontañ div wech ar memes familhoù.

##### ○ Breizh-Uhel / Breizh-lzel

Bet savet diwar kumun bevañ al liseidi.

##### ○ Barregezh yezh ar familh

7 rummad zo bet savet da gentañ :

- BZG Tad Mamm : Tad ha mamm a oar brezhoneg mat pe mat a-walc'h
- BZG Tad : An tad hepken a oar brezhoneg, ar vamm a oar un tamm pe tamm ebet
- BZG Mamm : Ar vamm hepken a oar brezhoneg, an tad a oar un tamm pe tamm ebet
- BZG- Tad Mamm : tad ha mamm a oar brezhoneg un tammig
- BZG- Tad : An tad hepken a oar brezhoneg un tammig, ar vamm ne oar ket
- BZG- Mamm : Ar vamm hepken a oar brezhoneg un tammig, an tad ne oar ket
- DIVZK : Ne oar brezhoneg nag an tad nag ar vamm.

3 rummad zo bet savet goude-se :

- BZG : An tad pe ar vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg.
- BZG- : An tad pe ar vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg un tammig.
- DIVZK : Ne oar brezhoneg nag an tad nag ar vamm.

Ur pevare rummad zo bet ouzhpennet goude o tispartiañ ar familhoù BZG o lakaat d'un tu ar re a dreuzkas brezhoneg d'o bugale (1 treuzkaser pe 2) ha d'un tu all ar re ne dreuzkasont ket :

- BZG T : An tad pe ar vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg hag a dreuzkas ar yezh d'o bugel.
- BZG : An tad pe ar vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg met ne dreuzkasont ket.
- BZG- : An tad pe ar vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg un tammig.
- DIVZK : Ne oar brezhoneg nag an tad nag ar vamm.

#### ○ Santimant ar familh ouzh ar brezhoneg

3 rummad zo bet savet diwar santimant an tad hag ar vamm ouzh ar brezhoneg hervez o bugel :

- 2 TOMM : Tad ha mamm zo tomm ouzh ar brezhoneg (tomm = tomme-tre + tomm a-walc'h)
- 1 TOMM : An tad pe ar vamm zo tomm ouzh ar brezhoneg
- 0 TOMM : Nag an tad nag ar vamm n'int tomm ouzh ar brezhoneg.

#### ○ Niver a dreuzkaserien er familh

4 rummad zo bet savet diwar emzalc'h treuzkas an tadoù hag ar mammoù :

- 2 DREUZKASER : Tad ha mamm a gomz brezhoneg ouzh o bugel atav pe kement hag en ur yezh all
- 1 TREUZKASER Mamm : Ar vamm a gomz brezhoneg ouzh he bugel atav pe kement hag en ur yezh all
- 1 TREUZKASER Tad : An tad a gomz brezhoneg ouzh e vugel atav pe kement hag en ur yezh all
- 0 TREUZKASER : Nag an tad nag ar vamm ne gomzont brezhoneg ouzh o bugel atav pe kement hag en ur yezh all.

### 1.4.2. Sevel feuriaderioù

Meur a feuriader zo bet savet o reiñ poentoù da respontoù zo bet roet gant al liseidi hag o sammañ ar poentoù-se. Sed amañ dindan un tamm displegadenn war ar mod m'eo bet savet pep hini anezho.

#### ○ Santimant war o live brezhoneg gant al liseidi

Goulennet zo bet gant al liseidi peseurt live brezhoneg o doa war pemp tachenn (geriaoueg, geriaoueg ar santimantoù, yezhadur, distagadur, troioù-lavar...). Roet hon eus poentoù d'ar respontoù hervez an derez dibabet : 4 foent evit « mat », 3 foent evit « mat a-walc'h », 2 boent evit « etre », 1 poent evit « bresk ». Etre 5 ha 20 poent a c'helle kaout al liseidi. Savet hon eus ur skeul evit muzuliañ ar santimant hollek :

- etre 5 hag 8 poent : live bresk
- etre 9 ha 12 poent : live etre
- etre 13 ha 16 poent : live mat a-walc'h
- etre 17 hag 20 poent : live mat

#### ○ Kementad pleustroù sevenadurel al liseidi

Goulennet zo bet gant al liseidi pegen alies e veze lennet, kanet, darempredet mediaoù brezhonek gante. Roet hon eus poentoù d'ar respontoù hervez an derez dibabet : 3 foent evit « alies », 2 boent evit « a-wechoù », 1 poent evit « james ». Etre 3 ha 9 foent a c'helle kaout al liseidi. 8 zo bet d'ar muiañ. Savet hon eus ur skeul evit muzuliañ ar pleustroù sevenadurel e brezhoneg :

- 3 ha 4 foent : netra pe dost
- 5 ha 6 poent : gwan pe etre
- 7 hag 8 poent : kreñv

○ Live treuzkas er familh

Lakaet zo bet 4 live treuzkas er familh (kreñv, etre, gwan, n'eus ket), diouzh ar c'hementad a vrezhoneg a vez gant an tad ha gant ar vamm pa vez o kaozeal ouzh e / he bugel.

Mamm / tad	Atav	50 %	a-wechoù	james
atav	Treuzkas kreñv			
50 %		Treuzkas etre		
a-wechoù			Treuzkas gwan	
james				N'eus ket

Len : Ul live treuzkas er familh « etre » a zo pa gomz ar vamm e brezhoneg ouzh he bugel atav hag an tad james.

○ Neuz yezhel ar familhoù

Gallout a reer soñjal e vez lañsus pe lañsusoc'h ar familhoù evit ma teufe ar brezhoneg ur yezh perc'hennet da vat gant o bugale. Klasket e vez priziañ live broud ar familhoù en ur gemer harp war teir elfenn eus neuz yezhel ar familhoù : barregezh ar gerent war ar brezhoneg, santimant ar gerent ouzh ar brezhoneg ha live treuzkas.

- Barregezh ar familh : 2 boent pa vez an tad pe ar vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg, 1 poent pa vez an tad pe ar vamm d'an nebeutañ a oar un tamm brezhoneg, poent ebet pa ne vez hini ebet a oar brezhoneg.
- Santimant ar familh : 2 boent pa vez tomm ouzh ar brezhoneg an tad hag ar vamm, 1 poent pa vez tomm an tad pe ar vamm, poent ebet pa ne vez ket tomm nag unan nag egile.
- Treuzkas er familh : 3 foent pa vez kreñv an treuzkas, 2 boent pa vez etre an treuzkas, 1 poent pa vez gwan an treuzkas, poent ebet pa ne vez ket treuzkas ebet.

Etre 0 ha 7 poent e c'hello kaout ar familhoù :

- 0-1 poent : familhoù pell diouzh ar brezhoneg
- 2-3 foent : familhoù klouar e-keñver ar brezhoneg
- 4-5 poent : familhoù desachet gant ar brezhoneg
- 6-7 poent : familhoù brezhonek penn-kil-ha-troad

○ Profil brezhonek al liseidi

Ar pal a oa muzuliañ kreñvder liamm al liseidi ouzh ar brezhoneg. Tri dezverk hon eus kemeret harp warne :

- **ar santimant barregezh** : hag ar santimant o deus mestroniañ mat ar yezh ? Ha fiziañs o deus en o barregezh ?
- **an tan** : ha tomm eo o c'halon ouzh ar brezhoneg ? Ha stourm a reont evit lakaat ar yezh da lufrañ, evit ma chomfe bev ar yezh ?
- **ar soubenn** : pegen stank eo o implij eus ar brezhoneg war ar pemdez, er-maez eus al lise ? Pegen soubet int e-barzh ar yezh ?

Diaes eo gouzout hag-eñ zo unan eus an dezverkoù-se en deus ur pouez kreñvoc'h eget an daou all, se a zepand eus an dud. Divizet hon eus reiñ ar memes talvoudegezh tamm pe damm d'an tri

dezverk-se. Evit aesaat al labour hon eus implijet un nebeud muzulioù a oa diouto c'hoazh (da skouer : santimant barregezh war ar brezhoneg).

Sed aze penaos hon eus dasparzhet ar poentoù :

- **ar santimant barregezh (20 poent d'ar muiañ) :**
  - \* Petra eo da santimant war da live brezhoneg hiziv ? 5 tachenn ha 4 live barregezh, etre 5 hag 20 poent.
- **an tan (24 foent d'ar muiañ) :**
  - \* Pegen tomm en em santez ouzh ar brezhoneg ? 4 derez, etre 3 ha 12 poent.
  - \* Ha kemer a rez perzh, mod pe vod, er stourm evit ar brezhoneg ? 4 derez, etre 3 ha 12 poent.
- **ar soubenn (25 poent d'ar muiañ) :**
  - \* Ha komz a ra da vamm brezhoneg ouzhit ? 4 derez, etre 1 ha 4 foent.
  - \* Ha komz a rez brezhoneg ouzh da vamm ? 4 derez, etre 1 ha 4 foent.
  - > sammet eo bet ar respontoù-se ha rannet dre zaou : etre 1 ha 4 foent en holl.
  - \* Ha komz a ra da dad brezhoneg ouzhit ? 4 derez, etre 1 ha 4 foent.
  - \* Ha komz a rez brezhoneg ouzh da dad ? 4 derez, etre 1 ha 4 foent.
  - > sammet eo bet ar respontoù-se ha rannet dre zaou : etre 1 ha 4 foent en holl.
  - \* Ha komz a rez brezhoneg gant da vreudeur ha c'hoarezed ? 4 derez, etre 1 ha 4 foent.
  - \* Ha komz a rez brezhoneg gant da dud-kozh ? 4 derez, etre 1 ha 4 foent.
  - \* Pegen stank eo da bleustroù sevenadurel e brezhoneg (lenn, kanañ, kleweled) ? 3 zachenn, 3 derez, etre 3 ha 9 foent.

Pa ne oa ket respont ebet d'ur goulenn eo bet roet an niver bihanañ a boentoù.

Etre 18 ha 69 foent e c'helle bezañ ez teorik. Etre 18 ha 63 zo bet e gwirionez, ar pezh a dalvez 46 live.

Savet hon eus 4 rummad diwarne :

- rummad etre 18 ha 28 poent : al liseidi pell diouzh ar brezhoneg
- rummad etre 29 ha 39 foent : al liseidi klouar e-keñver ar brezhoneg
- rummad etre 40 ha 51 poent : al liseidi desachet gant ar brezhoneg
- rummad etre 52 ha 63 foent : al liseidi brezhonek penn-kil-ha-troad.

## 1.5. Doare kinnig ar respontoù

Liseidi zo n'o deus ket respontet d'an holl c'houlennoù. 302 respont a c'hell bezañ d'ur goulenn, 310 d'unan all da skouer. Pa ne vez linenn ebet en taolennoù o venegiñ « respont ebet » e talv eo bet jedet an dregantadoù hep kemer e kont an dud n'o deus ket respontet d'ar goulenn-se.

Pouezus eo kaout soñj eo al liseidi o deus respontet d'ar goulennoù. Pa vez kaoz eus barregezh o zud war ar brezhoneg pe eus santimant o zud ouzh ar brezhoneg eo sell al liseidi war an traoù-se a zo dastumet aze ha n'eo ket dre ret ar pezh o dije respontet o zud o-unan.


## 2. An disoc'hoù simpl

### 2.1. Al liseidi

315 lisead a oa skoliataet e lise Diwan Karaez e miz Kerzu 2019. 314 lisead o deus respontet d'ar c'houlennaoueg.


#### 2.1.1. Piv eo al liseidi ?

Reizh



Diazez : 314 respont  
Lenn : 47,5 % eus al liseidi zo paotred.

Bloaz ganedigezh




Diazez : 314 respont  
Lenn : 110 lisead zo ganet e 2004, da lâret eo 35 % eus al liseidi.

Live klas


	Niver a glasadoù	Niver a dud
Eilvet	4	108
Kentañ	3	99
Termen	4	107

Diazez : 314 respont  
Lenn : 4 c'hlasad Termen a vod 107 skoliad Termen, da lâret eo 34 % eus al liseidi.




Lec'h bevañ

Liseidi Diwan Karaez



Diazez : 314 respont  
Lenn : 61 % eus al liseidi zo o chom e Penn-ar-Bed.


Skolidi kentañ derez Diwan



Mammenn : rouedad Diwan




*Liseidi Diwan Karaez*



Diazez : 314 respont  
Lenn : 89 % eus al liseidi zo o chom e Breizh-Izel.


*Hollad liseidi Breizh*



Mammenn : Ofis Publik ar Brezhoneg


*Skoliata kent*

*Kentañ derez*




Diazez : 314 respont  
Lenn : 24 % eus al liseidi a oa skoliataet e klasoù divyezhek publik er c'hentañ derez.

*Skolaj*



Diazez : 314 respont  
Lenn : 25 % eus al liseidi a oa skoliataet e skolaj Diwan ar Releg

*Hentadoù orin skolajidi Diwan*



Diazez : 314 respont  
Lenn : 30 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan ar Releg a oa skoliataet en ur c'hlas divyezhek publik er c'hentañ derez.


## 2.1.2. Al liseidi hag ar brezhoneg

### C'hoant gouzout hiroc'h war an enklask-mañ

70 % a fellfe dezho resev disoc'hoù an enklask.

47 % a vefe prest da vezañ aterset ma vefe ezhomm.


### O santimant war o live brezhonek



Diazez : 312 respont diwar 314

Len : 15 % eus al liseidi bet embannet o soñj a gav dezho o deus ul live mat e yezhadur.


### Santimant hollek war o live brezhoneg (s.o. mod da sevel ar feuriader-se p.5)



Diazez : 312 respont diwar 314

Len : 48 % eus al liseidi a gav dezho o deus ul live brezhoneg mat a-walc'h.

### O santimant ouzh ar brezhoneg




Diazez : 312 respont diwar 314

Len : 30 % eus al liseidi bet embannet o soñj a zo tomm-tre o c'halon ouzh ar brezhoneg ; N'eus hini ebet a zo aet skuizh gant ar brezhoneg pe a sav a-enep ar brezhoneg.

## Implij ar brezhoneg gant o mignoned

Ha mignoned 'teus (e-barzh pe er-maez eus al lise), ha brezhoneg ar yezh voas etrezoc'h er-maez eus al lise ?

Ne 'm eus ket       1 mignon       2 pe 3 mignon       4 pe 5       6 ha muioc'h



Diazez : 308 respont diwar 314

Len : 17 % eus al liseidi o deus disklêriet kaout 6 mignon pe muioc'h ma vez ar brezhoneg ar yezh voas evit komz ganto.

Evezhiadenn : Lod eus al liseidi o deus komprenet "ar yezh voas" evel "la langue habituelle" ha reoù all evel "une langue habituelle". Gant se zo lod a zo kustum da gomz brezhoneg gant mignoned zo er-maez eus al lise (ha galleg ivez) o deus respontet ne raent ket peogwir o deus komprenet "la langue habituelle" ha lod all o deus respontet e komzent brezhoneg er-maez eus al lise gant ouzhpenn 6 mignon, padal e komzont brezhoneg gante a-wechoù hepken. Diaes eo tennañ gounid eus ar sifroù-se eta.


## Implij ar brezhoneg evit komz ouzh o zud

Evit ar goulenn-mañ n'hon eus kemeret e kont nemet al liseidi o deus un tad pe ur vamm, pe an daou, a oar brezhoneg mat pe mat a-walc'h.

30 % eus al liseidi o deus ur vamm a oar brezhoneg (65 ur vamm a oar mat, 29 a oar mat a-walc'h).  
28 % eus al liseidi o deus un tad a oar brezhoneg (65 un tad a oar mat, 24 a oar mat a-walc'h).

Hiziv, ha komz a rez brezhoneg ouzh da vamm ? [ouzh da dad ?]

Atav pe dost       Kement e brezhoneg hag en ur yezh all       A-wechoù       Ne ran ket



■ Atav pe dost    ■ Kement e brezhoneg hag en ur yezh all    ■ A-wechoù    ■ Ne reont ket

Diazez "mamm" : 86 respont diwar 87 e oar brezhoneg o mamm (mat pe mat a-walc'h)

Diazez "tad" : 80 respont diwar 84 e oar brezhoneg o zad

Len : 14 % eus al liseidi e oar brezhoneg o mamm a gomz brezhoneg outi atav pe dost.


		Ar vamm a gomz e brezhoneg ouzh he bugel...			
		Atav	Kement hag en ur yezh all	A-wechoù	James
Ar bugel a gomz e brezhoneg ouzh e / he mamm	Atav	92 %	0	0	0
	Kement hag en ur yezh all	0	100 %	2 %	0
	A-wechoù	8 %	0	91 %	0
	James	0	0	7 %	100 %

Len : 8 % eus al liseidi o deus ur vamm a gomz brezhoneg oute atav a gomz outi e brezhoneg a-wechoù.

		An tad a gomz e brezhoneg ouzh e vugel...			
		Atav	Kement hag en ur yezh all	A-wechoù	James
Ar bugel a gomz e brezhoneg ouzh e / he zad	Atav	80 %	0	0	0
	Kement hag en ur yezh all	17 %	80 %	0	0
	A-wechoù	3 %	13 %	82 %	0
	James	0	7 %	18 %	100 %

Lenn : 3 % eus al liseidi o deus un tad a gomz brezhoneg oute atav a gomz outañ e brezhoneg a-wechoù.


### Implij ar brezhoneg gant ar vreudeur ha/pe ar c'hoarezed



Diazez : 287 lisead gant breudeur/c'hoarezed a oar brezhoneg

Lenn : 64 % eus al liseidi a gomz brezhoneg d'o breudeur ha/pe d'o c'hoarezed a-wechoù (e-touez ar re o deus breudeur ha/pe c'hoarezed a oar brezhoneg).


### Implij ar brezhoneg gant an dud-kozh



Diazez : 207 lisead gant tud-kozh a gomz pe a gomze brezhoneg


Lenn : 9 % eus al liseidi o deus pe o deus bet tud-kozh vrezhonek a gomz (e) brezhoneg gante atav (diwall : a c'hellfe bezañ en o zouez liseidi a gomz atav brezhoneg gant lod eus o tud-kozh vrezhonek ha james gant lod all, daoust dezho bezañ brezhonegerien ivez).

### Pleustroù sevenadurel brezhonek (er-maez eus al labour skol)




Diazez : 312 respont diwar 314 ; Lenn : 10 % eus al liseidi a gan e brezhoneg alies.

## Kementad pleustroù sevenadurel (s.o. mod da sevel ar feuriader-se p.5)



Diazez : 312 respont diwar 314  
 Lenn : 6 % eus al liseidi o deus pleustroù sevenadurel brezhonek kreñv.

## Perzh er stourm evit ar brezhoneg (buhez kevredigezhel, stourm politikel, krouiñ, manifestiñ...)



Diazez : 312 respont diwar 314  
 Lenn : 27 % eus al liseidi ne gemeront ket perzh tamm ebet er stourm evit ar brezhoneg.

An doareoù stourm pennañ meneget gant al liseidi :


- manifestadegoù (meneget gant 37 % anezho),
- perzh er vuhez kevredigezhel (8%), Redadeg (7%),
- stourm evit ar breved pe ar bak e brezhoneg (6%),
- sinadegoù ha perzh e tabutoù (6%)...

## Raktres treuzkas ar brezhoneg d'ar vugale

Ma 'tefe bugale un deiz bennak, en em welout a rafes komz brezhoneg outo...


- Atav pe dost       E brezhoneg kement hag en ur yezh all       A-wechoù       Nebeut-tre pe james  
 Se zepanto eus ma fried       N'ouzon ket

Gant an holl liseidi bet embannet o soñj pe get



Diazez : 308 respont diwar 314  
 Lenn : 22 % eus al liseidi zo en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale atav.

Gant al liseidi o deus ur soñj sklaer war ar pezh a raint hepken



Diazez : 238 respont diwar 314  
 Lenn : E-touez al liseidi o deus ur soñj sklaer war an treuzkas brezhoneg d'o bugale, 28 % zo en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale atav.

## 2.2. Mammoù ha tadoù al liseidi

314 lisead zo met 22 koublad breudeur / c'hoarezed zo en o zouez. 292 « familh » zo en holl eta (familh a vez graet eus ar c'houblad kerent pe eus ar vamm hec'h-unan pa ne vez ket tad pe mamm all ebet). Titouroù hon eus diwar-benn 292 mamm ha 287 tad.


Evezhiadenn : Diwallit ! Er rannbennad-mañ e vo roet sifroù war an tadoù hag ar mammoù, ha n'eo ket war al liseidi. Lâret e vo da skouer ez eus 87 mamm a oar brezhoneg e-touez mammoù al liseidi, ha ne vo ket lâret ez eus 94 lisead o deus ur vamm hag a oar brezhoneg. Cheñch-dicheñch eo an niver a dadoù ha mammoù e grafikoù da heul kar lod eus al liseidi n'o deus ket respontet d'an holl c'houlennoù.

### 2.2.1. Piv int ?


#### Bloaz ganedigezh

Mammoù : etre 1958 ha 1982 int ganet. 1971 eo ar geidenn vloaz.


Tadoù : etre 1946 ha 1980 int ganet. 1968 eo ar geidenn vloaz.



Diazez : 270 mamm ha 265 tad (535)  
 Lenn : 22 % eus kerent al liseidi o deus tremenet o bugaleaj e Bro-C'hall.



#### Live studi an tadoù hag ar mammoù




Diazez : 286 mamm ha 274 tad (560)  
 Lenn : 29 % eus kerent al liseidi o deus diplomoù Bak +4 ha muioc'h hervez o bugale.

Evezhiadenn : Diaes eo kaout fiziañs er sifroù-se abalamour d'an niver uhel a liseidi na ouzont ket respont ha d'ar re o deus o deus respontet a-dreuz (anat pa geñverier ar vicher gant al live studi embannet, respontoù disheñvel gant ar breudeur hag ar c'hoarezed...).


## 2.2.2. O barregezh war ar brezhoneg

Ha goût a reont brezhoneg ?



Diazez : 292 mamm ha 286 tad (578)  
Lenn : 21 % eus tadoù al liseidi a oar brezhoneg mat.


Pegoulz o deus desket ?



Diazez : 85 mamm ha 79 tad  
Lenn : 44 % eus ar mammoù ha 67 % eus an tadoù brezhonek o deus desket brezhoneg a-raok kaout o bugel kentañ.


Penaos o deus desket ?

Mod deskiñ ar mammoù



Diazez : 87 mamm  
Lenn : 15% eus ar mammoù a oar komz brezhoneg (mat pe mat a-walc'h) o deus desket gant o zad. En tu all da 100% e ra rak meur a respont a oa posubl.


## Mod deskiñ an tadoù



Diazez : 84 tad

Lenn : 37% eus an tadoù hag a oar komz brezhoneg (mat pe mat a-walc'h) o deus desket gant ar c'hentelioù. En tu all da 100% e ra rak meur a respont a oa posubl.

## Mod deskiñ ar gerent (mammoù ha tadoù bodet)



Diazez : 171 tad ha mamm

Lenn : 20% eus ar gerent a oar komz brezhoneg (mat pe mat a-walc'h) o deus desket gant o zad. En tu all da 100% e ra rak meur a respont a oa posubl.

## Doare deskiñ ha rummad oad

Sammad ar rummadoù oad ne glot ket gant an hollad kar n'eo ket bet resisaet bloaz ganedigezh an holl dud. Da skouer, 87 mamm vrezhonek zo, 26 zo ganet a-raok 1970, 54 adalek 1970, ha 7 n'eo ket bet resisaet o bloaz ganedigezh.


	Ganet a-raok 1970 (67)		Ganet adalek 1970 (87)		An holl (171)	
N'ouzon ket	2	3 %	1	1 %	5	3 %
Familh	22	33 %	28	32 %	59	34 %
Er skol	3	4 %	8	9 %	12	7 %
Kelenn d'an dud deuet	45	67 %	66	76 %	119	70 %
E-unan	17	25 %	9	10 %	28	16 %
Labour	7	10 %	15	17 %	24	14 %
Gant ar pried	3	4 %	9	10 %	12	7 %

Diazez : 171 tad ha mamm a oar brezhoneg.

Lenn : 25 % eus ar gerent brezhonek ganet a-raok 1970 o deus desket brezhoneg o-unan.



## 2.2.3. O santimant ouzh ar brezhoneg



Diazez : 285 lisead o deus respontet evit soñj o mammoù diwar 314 lisead; 278 lisead o deus respontet evit soñj o zadoù diwar 314 lisead


Len : 5 % eus mammoù al liseidi (ar re zo bet embannet o soñj) ne reont forzh eus ar brezhoneg hervez o bugale.

## 2.2.4. Treuzkas ar brezhoneg dre ar skol

### An abegoù skoliata brezhonek (hervez al liseidi)

*D'az soñj, peseurt abegoù pennañ o deus broudet da dud da gas ac'hanout d'ur skol vrezhonek ?*

- |  |  |
|--|--|
| <input type="checkbox"/> Skol gevredigezhel, perzh ar gerent er skol | <input type="checkbox"/> Pedagogiezh plijus, kelennerien sichant |
| <input type="checkbox"/> Evit saveteiñ ar brezhoneg                  | <input type="checkbox"/> Skol vihan, aergelc'h familh            |
| <input type="checkbox"/> Skol dostañ an ti                           | <input type="checkbox"/> Evit ar sevenadur                       |
| <input type="checkbox"/> Evit ma vefe desket brezhoneg ganin         | <input type="checkbox"/> N'ouzon ket                             |
| <input type="checkbox"/> Evit an divyezhegezh abred, ar spered digor | <input type="checkbox"/> Respont all                             |




Diazez : 314 respont

Len : 65 % eus al liseidi a soñj dezho int bet skoliataet e brezhoneg peogwir e felle d'o zud e vefe desket brezhoneg gante ; en tu all da 100 % e sav an hollad rak 3 abeg a c'halle dibab al liseidi.

## Eskemmoù kerent / liseidi diwar-benn abegoù ar skoliata brezhonek

Ha tro 'peus bet da gomz eus abegoù ar skoliata brezhonek gant da dud ?




Diazez : 301 respont diwar 314

Lenn : 54 % eus al liseidi a zisklêr bezañ bet komzet meur a wech eus abegoù ar skoliata brezhonek gant o zud.

## Youl an dud da gas o bugel d'ur skol vrezhonek

Hag unan (tad pe mamm) a oa mennetoc'h eget egile gant ar raktres skoliata brezhonek ?




Diazez : 306 respont diwar 314

Lenn : 47 % eus al liseidi a soñj dezho e oa o zad ken mennet hag o mamm gant ar raktres skoliata brezhonek.

## 2.2.5. Treuzkas ar brezhoneg er familhoù

Ne vez kemeret e kont nemet an tadoù hag ar mammoù a oar brezhoneg mat pe mat a-walc'h, da lâret eo 87 mamm ha 84 tad.


Ha komz a rae an tadoù hag ar mammoù brezhoneg d'o bugel pa oa 5 bloaz ?



Diazez : 87 mamm ha 81 tad

Lenn : 20 % eus mammoù brezhonek al liseidi a gomze brezhoneg atav d'o bugel pa oa 5 bloaz.

Ha komz a ra an tadoù hag ar mammoù brezhoneg d'o bugel hiziv ?



Diazez : 86 mamm ha 80 tad

Len : 14 % eus mammoù brezhonek al liseidi a gomz brezhoneg atav d'o bugel hiziv.

## 2.3. Neuz yezhel familhoù al liseidi

Er rannbennad-mañ e vo produet daou rummad sifroù :

- sifroù war familhoù al liseidi : « familh » vo graet eus an **292 koubladoù teorik tad-mamm**, daoust ma n'eus nemet ar vamm e familhoù zo ha daoust ma vez dispartiet lod eus ar c'houbladoù-se.
- sifroù war al liseidi e-lec'h ma vo kaoz eus plegenn familh pep lisead o c'houzout ez eus **314 lisead**.

Anat eo e vo tost-tre an dregantadoù familhoù ha liseidi. Pep hini a c'hello sachañ ar sifroù a zedenno anezhañ avat, diouzh e ezhommoù.

### 2.3.1. Barregezh ar gerent war ar brezhoneg

Gwelet penaos eo bet savet ar rummadoù (s.o. p. 4)

	Familhoù (292)			Liseidi (314)		
<b>BZG Tad Mamm</b>	34	12 %	} 47 %	37	12 %	} 47 %
<b>BZG Tad</b>	50	17 %		52	17 %	
<b>BZG Mamm</b>	53	18 %		57	18 %	
<b>BZG- Tad Mamm</b>	27	9 %	} 36 %	30	9 %	} 36 %
<b>BZG- Tad</b>	37	13 %		40	13 %	
<b>BZG- Mamm</b>	40	14 %		43	14 %	
<b>DIVZK</b>	51	17 %	17 %	55	17 %	17 %

Len : E 12 % eus familhoù al liseidi e oar brezhoneg an tad hag ar vamm.


E 9 % eus familhoù al liseidi e oar brezhoneg un tamm an tad hag ar vamm.

47 % eus al liseidi o deus un tad pe ur vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg mat pe mat a-walc'h.


### 2.3.2. Santimant ar gerent ouzh ar brezhoneg

Gwelet penaos eo bet savet ar rummadoù (s.o. p.5).

*Familhoù*



*Liseidi*



Diazez : 253 familh

Diazez : 270 lisead

Len : 43 % eus ar familhoù a zo enno un tad hag ur vamm hag a zo tomm ouzh ar brezhoneg. 44 % eus al liseidi eo tomm o zad hag o mamm ouzh ar brezhoneg.

### 2.3.3. Treuzkas brezhoneg

#### Niver a dreuzkaserien er familhoù


Gwelet penaos eo bet savet ar rummadoù (s.o. p.5).

	Familhoù (292)			Liseidi (314)	
2 TREUZKASER	9	3 %	} 20 %	10	3 %
1 TREUZKASER Mamm	15	5 %		16	5 %
1 TREUZKASER Tad	36	12 %		37	12 %
0 TREUZKASER	232	80 %		251	80 %


Len : 10 lisead a vez komzet brezhoneg dezho er gêr gant o zad hag o mamm atav pe kement hag en ur yezh all. 232 familh ne dreuzkasont ket ar brezhoneg d'o bugale en un doare kreñv pe etre.

#### Live an treuzkas er familhoù (s.o. mod da sevel ar feuriader-se p.6)

*Familhoù (292)*



*Liseidi (314)*



Len evit ar familhoù : 78% eus familhoù al liseidi ne dreuzkasont ket ar brezhoneg d'o bugale.


Len evit al liseidi : 77 % eus al liseidi ne vez ket treuzkaset dezho ar brezhoneg gant o zud.

### 2.3.4. Ur feuriader hollek « neuz yezhel ar familh »


Gant ar feuriader-se e fell deomp renkañ ar familhoù diouzh pegen lañsus int evit o bugel mont war-zu perc'hennañ ar brezhoneg. Teir elfenn zo bet kemeret e kont evit sevel ar feuriader-se :

- barregezh ar gerent war ar brezhoneg,
- o santimant ouzh ar brezhoneg
- al live treuzkas er familh (s.o. mod da sevel ar feuriader-se p.6).

*Familhoù (292)*



*Liseidi (314)*



Lenn : 22 % eus ar familhoù zo pell diouzh ar brezhoneg (n'int ket tomm ouzh ar brezhoneg, ne oaront ket brezhoneg, ne dreuzkasont ket brezhoneg). 22 % eus al liseidi o deus familhoù pell diouzh ar brezhoneg.

## 3. An disoc'hoù kroazet

El lodenn-se e vo klasket lakaat war-wel elfennoù a c'hell levezoniñ liamm al liseidi ouzh ar brezhoneg. Studiet e vo tri seurt levezon a c'hell bezañ :

- levezon an elfennoù sokiodemografek (an oad hag ar jener)
- levezon ar skoliata (ar c'hlas, an hentad skoliata)
- levezon ar familh (barregezh yezh ar gerent, santimant ar gerent, treuzkas gant ar gerent).

E-keñver al liamm etre ar brezhoneg hag al liseidi e vo studiet pevar ferzh anezhañ :

- ar santimant barregezh war ar brezhoneg (hag en em santout a ra al lisead barrek war ar brezhoneg ?)
- an « tan » (pegen tomm eo al liseidi ouzh ar brezhoneg ? Peseurt perzh o deus er stourm ? Ha klasket o deus kompren choaz o zud skoliata anezho e brezhoneg ?)
- ar « soubenn » (pegen stank eo o implij eus ar brezhoneg ? Gant o zud, o zud-kozh, o breudeur ha/pe c'hoarezed, e-keñver pleustroù sevenadurel...)
- ar raktres treuzkas (ha c'hoant o deus da gomz brezhoneg d'o bugale ?).


### 3.1. Levezon an elfennoù sokiodemografek

#### 3.1.1. An oad / al live klas

Etre 2001 ha 2005 e oa ganet al liseidi, met ar braz anezho zo ganet etre 2002 ha 2004. Kentoc'h evit kemer harp war ar bloaz ganedigezh hon eus diazezet ar rannbennad-se war al live klas : Eilvet, Kentañ, Termen. Ha merzout a reer e vez disheñvel al liamm etre al liseidi hag ar brezhoneg hervez al live klas ?

Ma vez kaoz eus neuz yezhel hollek familhoù al liseidi (barregezh ar gerent + santimant ouzh ar brezhoneg ar gerent + treuzkas er familh), ne verzer ket diforc'hioù bras hervez al live klas.

Santimant barregezh war ar brezhoneg




Diazez : 314 respont

Lenn : 25 % eus al liseidi e Termen klas a gav dezho o deus ul live mat e brezhoneg.

## An tan


### Santimant ouzh ar brezhoneg



Diazez : 314 respont

Lenn : 32 % eus al liseidi e Eilvet klas eo tomm-tre o c'halon ouzh ar brezhoneg.


### Perzh er stourm



Diazez : 314 respont

Lenn : 6 % eus al liseidi e Kentañ klas a zisklêr stourm kalz evit ar brezhoneg.

### Eskemmoù gant o zud war ar choazoù skoliata




Diazez : 314 respont

Lenn : 51 % eus al liseidi Eilvet klas o deus komzet meur a wech eus abegoù ar skoliata brezhonek gant o zud.

## Ar soubenn


### Komz ouzh o mamm



Diazez : 314 respont

Lenn : 6 % eus al liseidi en Eilvet klas ne gomzont ket brezhoneg d'o mamm daoust ma oar brezhoneg mat pe mat a-walc'h. 76 % eus al liseidi Kentañ klas ne oar ket brezhoneg o mamm.


### Komz ouzh o zad



Diazez : 314 respont

Lenn : 10 % eus al liseidi e Kentañ klas a gomz brezhoneg d'o zad atav.

### Komz gant o breudeur ha/pe c'hoarezed




Diazez : 287 lisead gant breudeur ha/pe c'hoarezed brezhonek

Lenn : 5 % eus al liseidi e Termen klas o deus breudeur ha/pe c'hoarezed brezhonek a gomz brezhoneg dezho atav.




### Komz gant o zud-kozh



Diazez : 207 lisead gant tud-kozh vrezhonek (207 den).

Len : 4 % eus al liseidi e Termen klas a gomz brezhoneg atav gant o zud-kozh pe lod anezho.


### Pleustroù sevenadurel brezhonek



Diazez : 314 respont

Len : 54 % eus al liseidi e Eilvet klas n'o deus ket a bleustroù sevenadurel e brezhoneg pe nebeut-tre.

### Raktres treuzkas brezhoneg d'o bugale




Diazez : 314 respont

Len : 2 % eus al liseidi e Termen klas n'emaint ket en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale.

### 3.1.2. Ar jener

Ma vez kaoz eus neuz yezhel hollek familhoù al liseidi (barregezh ar gerent + santimant ouzh ar brezhoneg ar gerent + treuzkas er familh), ne verzer ket diforc'hoù bras hervez ar jener.


#### Santimant barregezh war ar brezhoneg



Diazez : 314 respont  
 Lenn : 29 % eus al liseadezed gav dezho o deus ul live mat e brezhoneg.


#### An tan

#### Santimant ouzh ar brezhoneg




Diazez : 314 respont  
 Lenn : 23 % eus ar baotred eo tomm-tre o c'halon ouzh ar brezhoneg.

#### Perzh er stourm



Diazez : 314 respont  
 Lenn : 7 % eus al liseadezed a zisklêr stourm kalz evit ar brezhoneg.

### Eskemmoù gant o zud war ar choazoù skoliata




Diazez : 314 respont

Len : 42 % eus paotred al lise o deus komzet meur a wech eus abegoù ar skoliata brezhonek gant o zud.


### Ar soubenn

#### Komz ouzh o mamm



Diazez : 314 respont


Len : 3% eus paotred al lise a gomz brezhoneg ouzh o mamm atav.



Diazez : 94 lisead e oar brezhoneg o mamm.


Len : 11 % eus ar baotred ha 14 % eus ar merc'hed a gomz brezhoneg dezhi atav.

### Komz ouzh o zad



Diazez : 314 respont


Lenn : 7 % eus al liseadzed a gomz brezhoneg ouzh o zad.



Diazez : 89 lisead e oar brezhoneg o zad

Lenn : 33 % eus ar baotred ha 28 % eus ar merc'hed a gomz brezhoneg dezhañ atav.

### Komz gant o breudeur ha/pe c'hoarezed




Diazez : 287 lisead hag o deus breudeur ha/pe c'hoarezed brezhonek

Lenn : 19 % eus al liseadzed ne gomzont ket brezhoneg gant o breudeur ha/pe c'hoarezed james.

### Komz gant o zud-kozh

N'eus ket diforc'hioù splann paotred / merc'hed.


### Pleustroù sevenadurel brezhonek



Diazez : 314 respont

Lenn : 9 % eus al liseadzed o deus pleustroù sevenadurel kreñv e brezhoneg.


### Raktres treuzkas brezhoneg d'o bugale



Diazez : 314 respont

Lenn : 6 % eus paotred al lise n'emaint ket en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale.

### Gant al liseidi o deus ur soñj sklaer war ar pezh a raint hepken :



Diazez : 102 respont evit ar baotred ha 136 evit ar merc'hed

Lenn : E-touez ar merc'hed o deus ur soñj sklaer war an treuzkas brezhoneg d'o bugale, 50 % zo en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale kement hag en ur yezh all.

## 3.2. Levezon an hentad skoliata


Hentoù skoliata un tamm disheñvel zo bet heuliet gant liseidi Diwan. Er c'hentañ derez e oa 70 % anezho e skolioù Diwan padal e oa ar peurrest e klasoù divyezhek publik ha katolik dreist-holl. Tost an holl zo en em gavet goude e unan eus ar 6 skolaj Diwan. Ha merzout a reer e vez disheñvel al liamm etre al liseidi hag ar brezhoneg hervez ho hentenn skoliata er C'hentañ Derezh hag hervez o skolaj orin ?

### 3.2.1. Ar skoliata er c'hentañ derez

Ne vo kemeret e kont er rannbennad-mañ nemet al liseidi bet skoliataet e Diwan (220 den) pe klasoù divyezhek publik (77 den) ha katolik (9 den), da lâret eo 306 en holl. An 8 lisead all zo bet skoliataet lec'h all pe n'o deus ket respontet d'ar goulenn-se.

Ma vez kaoz eus neuz yezhel hollek familhoù al liseidi (barregezh ar gerent + santimant ouzh ar brezhoneg ar gerent + treuzkas er familh), ne verzer ket diforc'hioù bras hervez an hentenn skoliata er c'hentañ derez.


## Santimant barregezh war ar brezhoneg



Diazez : 220 lisead bet e Diwan, 77 lisead bet en hentenn publik ha 9 lisead en hentenn katolik.  
 Lenn : 45 % eus al liseidi bet e klasoù divyezhek katolik pa oant er c'hentañ derez a gav dezho e komzont mat brezhoneg.


## An tan

### Santimant ouzh ar brezhoneg




Diazez : 220 lisead bet e Diwan, 77 lisead bet en hentenn publik ha 9 lisead en hentenn katolik.  
 Lenn : 29 % eus al liseidi bet skolitaet e Diwan er c'hentañ derez zo tomm-tre o c'halon ouzh ar brezhoneg.

## Perzh er stourm



Diazez : 220 lisead bet e Diwan, 77 lisead bet en hentenn publik ha 9 lisead en hentenn katolik.  
 Lenn : 29 % eus al liseidi bet skolitaet e Diwan er c'hentañ derez ne gemeront ket perzh er stourm evit ar brezhoneg.


### Eskemmoù gant o zud war ar choazoù skoliata



Diazez : 220 lisead bet e Diwan ; 77 lisead bet en hentenn publik ha 9 lisead en hentenn katolik  
 Lenn : 57 % eus al liseidi bet skoliataet e Diwan er c'hentañ derez o deus komzet meur a wech eus abegoù ar skoliata brezhonek gant o zud.


### Ar soubenn

#### Komz ouzh o mamm



Diazez : 220 lisead bet e Diwan ; 77 lisead bet en hentenn publik ha 9 lisead en hentenn katolik  
 Lenn : 8 % eus al liseidi bet en ur c'hlas divyezhek publik pa oant er c'hentañ derez ne gomzont ket brezhoneg d'o mamm daoust ma oar brezhoneg mat pe mat a-walc'h.

#### Komz ouzh o zad



Diazez : 220 lisead bet e Diwan ; 77 lisead bet en hentenn publik ha 9 lisead en hentenn katolik  
 Lenn : 10 % eus al liseidi bet skoliataet e Diwan er c'hentañ derez a gomz brezhoneg d'o zad atav.

Komz gant o breudeur ha/pe c'hoarezed  
 Komz gant o zud-kozh  
 Pleustroù sevenadurel brezhonek

N'eus ket diforc'hioù splann Diwan / klas divyezhek publik / klas divyezhek katolik.


### Raktres treuzkas brezhoneg d'o bugale

N'eus ket diforc'hioù splann Diwan / klas divyezhek publik / klas divyezhek katolik.

## 3.2.2. Ar skolaj orin

Ne vo kemeret e kont er rannbennad-mañ nemet al liseidi bet skoliataet en ur skolaj Diwan, da lâret eo 310 en holl. Ar 4 lisead all zo bet skoliataet lec'h all pe n'o deus ket respontet d'ar goulenn-se.

### Santimant barregezh war ar brezhoneg




Diazez : 310 lisead bet skoliataet e skolajoù Diwan (79 er Releg, 48 e Kemper, 52 e Gwiseni, 49 e Gwened, 73 e Plijidi, 9 e Naoned)

Lenn : 27 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Gwiseni a gav dezho e komzont brezhoneg mat.

### An tan

#### Santimant ouzh ar brezhoneg




Diazez : 310 lisead bet skoliataet e skolajoù Diwan (79 er Releg, 48 e Kemper, 52 e Gwiseni, 49 e Gwened, 73 e Plijidi, 9 e Naoned)

Lenn : 45 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Gwened eo tomm-tre o c'halon ouzh ar brezhoneg.




### Perzh er stourm



Diazez : 310 lisead bet skoliataet e skolajoù Diwan (79 er Releg, 48 e Kemper, 52 e Gwiseni, 49 e Gwened, 73 e Plijidi, 9 e Naoned)  
 Lenn : 34 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Naoned a gemer kalz a berzh er stourm evit ar brezhoneg.


### Eskemmoù gant o zud war ar choazoù skoliata



Diazez : 310 lisead bet skoliataet e skolajoù Diwan (79 er Releg, 48 e Kemper, 52 e Gwiseni, 49 e Gwened, 73 e Plijidi, 9 e Naoned)  
 Lenn : 68 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Kemper o deus komzet meur a wech eus abegoù ar skoliata brezhonek gant o zud.

### Ar soubenn

#### Neuz yezhel ar familh




Diazez : 310 lisead bet skoliataet e skolajoù Diwan (79 er Releg, 48 e Kemper, 52 e Gwiseni, 49 e Gwened, 73 e Plijidi, 9 e Naoned)  
 Lenn : 33 % eus al liseidi bet skoliataet e skolaj Naoned eo kreñv pe kreñv a-walc'h o liamm gant ar brezhoneg (penn-kil-ha-troad pe desachet).

### Komz ouzh o mamm/ Komz ouzh o zad

N'eus ket diforc'hioù splann pa geñverier ar 6 skolaj Diwan.

### Komz gant o breudeur ha/pe c'hoarezed

N'eo bet dalc'het amañ nemet al liseidi o deus breudeur ha/pe c'hoarezed (287 den).




Diazez : 287 lisead gant breudeur pe c'hoarezed a oar brezhoneg

Lenn : 8 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Gwiseni a gomz brezhoneg atav gant o breudeur ha/pe c'hoarezed.


### Komz gant o zud-kozh

#### Hini ebet ne oar brezhoneg



Diazez : 310 lisead bet skoliataet e skoloù Diwan (79 er Releg, 48 e Kemper, 52 e Gwiseni, 49 e Gwened, 73 e Plijidi, 9 e Naoned).  
Lenn : 56 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Naoned n'o deus na tad-kozh na mamm-gozh ebet a oar brezhoneg.


### E-touez al liseidi o doa pe o deus tud-kozh vrezhonek



Diazez : 207 lisead o doa pe o deus tud-kozh vrezhonek.


Lenn : 13 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Kemper a gomz brezhoneg d'o zud-kozh atav.

### Pleustroù sevenadurel brezhonek



Diazezh : 310 lisead bet skoliataet e skolajoù Diwan (79 er Releg, 48 e Kemper, 52 e Gwiseni, 49 e Gwened, 73 e Plijidi, 9 e Naoned)  
 Lenn : 58 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan ar Releg n'o deus ket pleustroù sevenadurel e brezhoneg pe dost.

### Raktres treuzkas brezhoneg d'o bugale



Diazezh : 310 lisead bet skoliataet e skolajoù Diwan (79 er Releg, 48 e Kemper, 52 e Gwiseni, 49 e Gwened, 73 e Plijidi, 9 e Naoned)  
 Lenn : 17 % eus al liseidi bet e skolaj Diwan Plijidi ne ouzont ket hag-eñ e komzint brezhoneg d'o bugale pe get.

## 3.3. Levezon neuz yezhel ar familh


### 3.3.1 Barregezh yezh ar gerent ha treuzkas er familh

Evit studiañ levezon barregezh yezh ar gerent war liamm al liseidi ouzh ar brezhoneg ez eus bet savet pevar rummad :

- al liseidi o deus un tad pe ur vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg hag e vez treuzkaset ar yezh dezho er gêr (brezhoneg ha treuzkas) : 63
- al liseidi o deus un tad pe ur vamm d'an nebeutañ a oar brezhoneg met ne vez ket treuzkaset dezho ar yezh er gêr (brezhoneg hep treuzkas) : 83
- al liseidi o deus un tad pe ur vamm d'an nebeutañ a oar un tamm brezhoneg (brezhoneg un tamm) : 113
- al liseidi eo divrezhonek o zad ha o mamm : 55

Dispartiañ an tadoù ha mammoù brezhonek a dreuzkas hag ar re ne dreuzkasont ket a vo talvoudus evit gouzout hag-eñ e c'hell ar barregezh hep an treuzkas kaout un efed dispriziañ ar brezhoneg.


## Santiment barregezh war ar brezhoneg



Diazezh : 314 lisead (63 brezhoneg ha treuzkas, 83 brezhoneg hep treuzkas, 113 brezhoneg un tamm, 55 divrezhonek).  
 Lenn : 41 % eus al liseidi a vez treuzkaset ar brezhoneg dezho er gêr gant o zad pe o mamm pe an daou a gav dezho e komzont brezhoneg mat.


## An tan

### Santiment ouzh ar brezhoneg




Diazezh : 314 lisead (63 brezhoneg ha treuzkas, 83 brezhoneg hep treuzkas, 113 brezhoneg un tamm, 55 divrezhonek).  
 Lenn : 24 % eus al liseidi o deus tud divrezhonek eo tomm-tre o c'halon ouzh ar brezhoneg.

## Perzh er stourm



Diazezh : 314 lisead (63 brezhoneg ha treuzkas, 83 brezhoneg hep treuzkas, 113 brezhoneg un tamm, 55 divrezhonek).  
 Lenn : 5 % eus al liseidi a oar brezhoneg o zud met ne dreuzkasont ket ar yezh dezho a gemer kalz a berzh er stourm evit ar brezhoneg.

## Eskemmoù gant o zud war ar choazoù skoliata




Diazez : 314 lisead (63 brezhoneg ha treuzkas, 83 brezhoneg hep treuzkas, 113 brezhoneg un tamm, 55 divrezhonek).  
Lenn : 54 % eus al liseidi e oar brezhoneg un tamm o zad pe o mamm pe an daou o deus komzet meur a wech eus abegoù ar skoliata brezhonek gant o zud.

## Ar soubenn

### Komz gant o breudeur ha/pe c'hoarezed


N'eo bet dalc'het amañ nemet al liseidi o deus breudeur ha/pe c'hoarezed a oar brezhoneg (287 den).



Diazez : 287 lisead gant breudeur ha/pe c'hoarezed a oar brezhoneg (Brezhoneg ha treuzkas (57) ; Brezhoneg hep treuzkas (76) ; Brezhoneg un tamm (105) ; Divrezhonek (49))  
Lenn : 33 % eus al liseidi a oar brezhoneg o zud met ne dreuzkasont ket ar yezh dezho ne gomzont ket brezhoneg gant o breudeur ha/pe c'hoarezed james.


### Komz gant o zud-kozh

N'eo bet dalc'het amañ nemet al liseidi o doa tud-kozh vrezhonek (207 den).




Diazez : 207 lisead gant tud-kozh a oar/ a ouie brezhoneg (Brezhoneg ha treuzkas (40) ; Brezhoneg hep treuzkas (61) ; Brezhoneg un tamm (78) ; Divrezhonek (28))  
Lenn : 7 % eus al liseidi a oar un tamm brezhoneg o zud a gomz e brezhoneg atav gant o zud-kozh vrezhonek.

### Pleustroù sevenadurel brezhonek




Diazezh : 314 lisead (63 brezhonek ha treuzkas, 83 brezhonek hep treuzkas, 113 brezhonek un tamm, 55 divrezhonek).  
 Lenn : Hini ebet eus al liseidi o deus tad ha mamm divrezhonek n'o deus pleustroù sevenadurel kreñv e brezhonek.

### Raktres treuzkas brezhonek d'o bugale



Diazezh : 314 lisead (63 brezhonek ha treuzkas, 83 brezhonek hep treuzkas, 113 brezhonek un tamm, 55 divrezhonek).  
 Lenn : 33 % eus al liseidi eo divrezhonek o zud ne ouzont ket hag-eñ e komzint brezhonek d'o bugale pe get.


*Gant al liseidi o deus ur soñj sklaer war ar pezh a raint hepken (238 lisead) :*



Diazezh : 238 lisead (53 brezhonek ha treuzkas, 63 brezhonek hep treuzkas, 89 brezhonek un tamm, 33 divrezhonek).  
 Lenn : E-touez al liseidi o deus ur familh divrezhonek hag o deus ur soñj sklaer war an treuzkas brezhonek d'o bugale, 24% zo en soñj da gomz brezhonek d'o bugale atav.

### 3.3.2. Santimant ar gerent ouzh ar brezhoneg


#### Santimant barregezh war ar brezhoneg



Diazezh : 314 lisead (137 tad ha mamm tomm, 109 tad pe mamm tomm, 68 hini ebet zo tomm).  
 Lenn : 29 % eus al liseidi eo tomm o zad hag o mamm ouzh ar brezhoneg a gav dezho o deus ul live mat e brezhoneg.


#### An tan

#### Santimant ouzh ar brezhoneg




Diazezh : 314 lisead (137 tad ha mamm tomm, 109 tad pe mamm tomm, 68 hini ebet zo tomm).  
 Lenn : 7 % eus al liseidi eo diseblant o zud ouzh ar brezhoneg a zo tomm tre ouzh ar brezhoneg.

#### Perzh er stourm



Diazezh : 314 lisead (137 tad ha mamm tomm, 109 tad pe mamm tomm, 68 hini ebet zo tomm).  
 Lenn : 55 % eus al liseidi o deus pe un tad pe ur vamm tomm ouzh ar brezhoneg a stourm un tammig evit ar brezhoneg.

### Eskemmoù gant o zud war ar choazoù skoliata




Diazez : 314 lisead (137 tad ha mamm tomm, 109 tad pe mamm tomm, 68 hini ebet zo tomm).  
 Lenn : 62 % eus al liseidi eo tomm o zad hag o mamm ouzh ar brezhoneg o deus komzet meur a wech eus abegoù ar skoliata brezhonek gant o zud.

### Ar soubenn


#### Komz gant o zud-kozh

N'eo bet dalc'het amañ nemet al liseidi o doa tud-kozh vrezhonek (207 den).



Diazez : 207 lisead hag o doa tud-kozh a oar brezhoneg  
 Lenn : 13 % eus al liseidi eo diseblant o zud ouzh ar brezhoneg a gomz brezhoneg atav gant o zud-kozh pe lod anezho.


### Pleustroù sevenadurel brezhonek



Diazez : 314 lisead (137 tad ha mamm tomm, 109 tad pe mamm tomm, 68 hini ebet zo tomm).  
 Lenn : 48 % eus al liseidi o deus pe un tad pe ur vamm tomm ouzh ar brezhoneg n'o deus ket a bleustroù sevenadurel e brezhoneg pe nebeut-tre.



## Raktres treuzkas brezhoneg d'o bugale



Diazez : 314 lisead (137 tad ha mamm tomm, 109 tad pe mamm tomm, 68 hini ebet zo tomm).


Lenn : 9 % eus al liseidi eo diseblant o zud ouzh ar brezhoneg zo en soñj da gomz brezhoneg d'o bugale atav m'o defe bugale un deiz bennak.

## 4. Profil brezhoneger al liseidi : un dipologiezh

A-raok klozañ an danevell-mañ e felle deomp klask rummata al liseidi hervez an doare liamm, kreñv pe greñvoc'h, gwan pe wanoc'h, o doa gant ar brezhoneg, ha goude-se keñveriañ ar rummadoù liseidi ouzh neuz yezhel o familhoù. Ar goulennoù a oa e-barzh hor penn a oa : daoust hag al liseidi o deus al liamm kreñvañ ouzh ar brezhoneg o deus ur familh brezhonek penn-kil-ha-troad ivez ? Ha bezañ zo liseidi o tont eus familhoù brezhonek penn-kil-ha-troad ha n'int ket dedennet gant ar brezhoneg, d'an oad-mañ d'an nebeutañ ? Er c'hontrol, ha bezañ zo liseidi o tont eus familhoù pell diouzh ar brezhoneg o deus ul liamm kreñv gant ar brezhoneg memestra ?

Evit gwelet penaos eo bet savet ar feuriader « profil brezhoneger al liseidi », kit p. 7.


### 4.1. Profil al liseidi hervez o frofil brezhoneger



Diazez : 314 respont

Len : 7 % eus al liseidi o pell diouzh ar brezhoneg hervez hon tipologiezh.

#### 4.1.1. Reizh




Diazez : 314 respont

Len : 42 % eus ar baotred ha 58 % eus ar merc'hed eo kreñv pe kreñv a-walc'h o liamm gant ar brezhoneg (penn-kil-ha-troad pe desachet).

## 4.1.2. Hentad skoliata


### Kentañ Derez



Diazez : 314 respont

Lenn : 7 % eus al liseidi bet skoliataet e Diwan er c'hentañ derez eo tanav-tanav o liamm ouzh ar brezhoneg (pell).

### Skolaj Diwan



Diazez : 310 lisead bet skoliataet e skolajoù Diwan (79 er Releg, 48 e Kemper, 52 e Gwiseni, 49 e Gwened, 73 e Plijidi, 9 e Naoned)

Lenn : 10 % eus al liseidi bet skoliataet e skolaj Diwan Plijidi eo tanav-tanav o liamm ouzh ar brezhoneg (pell).


### Abegoù skoliata

Ne vez meneget amañ nemet an abegoù ma'z eus bet merzet diforc'hioù hervez rummadoù an dipologiezh.

	Ar re penn-kil-ha-troad	Ar re desachet	Ar re glouar	Ar re pell diouzh ar brezhoneg
Deskiñ brezhoneg	74 %	64 %	66 %	52 %
Saveteiñ ar brezhoneg	56 %	39 %	31 %	43 %
Sevenadur	44 %	47 %	24 %	19 %
Divyezhegezh abred, spered digor	44 %	45 %	56 %	57 %
Aergelc'h familh	19 %	27 %	33 %	38 %
Ne ouzont ket	0	5 %	3 %	10 %

Lenn : 44 % eus al liseidi penn-kil-ha-troad ha 57 % eus al liseidi pell diouzh ar brezhoneg a soñj dezho eo tuioù mat an divyezhegezh abred hag ar spered digor unan eus an abegoù o deus broudet o zud da skoliata anezho en un hentenn divyezhek.


## Raktres treuzkas d'o bugale



Diazez : 314 respont

Lenn : 74 % eus al liseidi penn-kil-ha-troad zo en soñj da gomz brezhoneg atav d'o bugale m'o defe bugale un deiz bennak.

*Gant al liseidi o deus ur soñj sklaer war ar pezh a raint hepken (238 lisead) :*



Diazez : diwar 238 lisead (15 penn kil-ha-troad ; 79 re desachet ; 132 klouar, 12 pell diouzh ar brezhoneg

Lenn : E-touez al liseidi pell diouzh ar brezhoneg hag o deus ur soñj sklaer war an treuzkas brezhoneg d'o bugale, 17 % anezho zo en soñj da gomz brezhoneg atav d'o bugale m'o defe bugale un deiz bennak.

## 4.2. Liamm etre profil brezhoneger al liseidi ha neuz yezhel o familh

Al liseidi ► Ar familh ▼	Ar re penn-kil-ha-troad		Ar re desachet		Ar re glouar		Ar re pell diouzh ar brezhoneg	
<b>Penn-kil-ha-troad</b>	12	45 %	12	9 %	2	2 %	0	0
<b>Desachet</b>	9	33 %	41	31 %	24	17 %	3	10 %
<b>Klouar</b>	6	22 %	59	45 %	70	56 %	8	45 %
<b>Pell diouzh ar brezhoneg</b>	0	0	20	15 %	38	25 %	10	45 %

Len : E-touez al liseidi penn-kil-ha-troad ez eus 45 % o tont eus familhoù penn-kil-ha-troad ha 33 % o tont eus familhoù desachet ha 22 % o tont eus familhoù klouar.

Al liseidi ► Ar familh ▼	Ar re penn-kil-ha-troad		Ar re desachet		Ar re glouar		Ar re pell diouzh ar brezhoneg	
<b>Penn-kil-ha-troad</b>	12	46 %	12	46 %	2	8 %	0	0
<b>Desachet</b>	9	12 %	41	53 %	24	31 %	3	4 %
<b>Klouar</b>	6	4 %	59	41 %	70	49 %	8	6 %
<b>Pell diouzh ar brezhoneg</b>	0	0	20	29 %	38	56 %	10	15 %

Len : Ar familhoù pell diouzh ar brezhoneg eo 29 % eus o bugale desachet gant ar brezhoneg, 56 % klouar ha 15 % pell diouzh ar brezhoneg.